

YF_0061_Son an displanterien mein bonn

Er bloaz dek ha tri-ugent 'n em lakas ar beizanted
Da stourm, evit ar wech kentan, enep d'an deknokrated.

Ar re gentan 'oa 'n em lakaet da zisplantan 'r mein-bonn
Oa 'barzh parrez Speiet paotred kalet ar c'hanton.

Tremen daou vil a vein-bonn a oa eno displantet
Ha da gichen ar vered e oant goude charreet

Er bloaz unnek ha tri-ugent 'oa taolet ar maer d'an traon
Ha lakaet 'barzh e blas konsailher kozh ar c'hanton.

Kaer en doa bet an T.A.C.O. hag e " vevel " Mazeran
Mont d'an Thomas dre gaer dre heg, chomet e oant boud gantan.

Displantet e oa mein-bonn ivez 'ba ' Parrez Telgrug
Goude ma oa eno ur maer heg a oa un den terrupl.

Er bloaz trizek ha tri-ugent 'oa "jeu" 'ba' Plonevez
Taolet ar maer kozh d'an traon, oa bec'h gant ar maer nevez.

Displantet e oa mein-bonn hag ivez charreet
'Kreiz ar vourc'h lakaet war-wel vit devezh ar votadeg.

Kement-all a oa graet c'hoazh 'ba' meur a lec'h dre ar vro,
'Ba' Eskibien ha Travrien hag ivez 'ba' Plourivo.

'Ba' Eskibien ha Travrien hag ivez 'ba' Plourivo
Met paotred Pont-ar-Veuzenn a oa aet ar maout ganto.

Tremen daou vil a vein-bonn a oa eno displantet
Ha da gichen ar "meri" lod ane 'oa bet kaset

Ha da gichen ar "meri" lod ane' oa bet kaset
Renket war vord ar prenestou nag e oant brav da weled.

War brenestou an ti-ker lod ane 'oa bet klenket
Ha lod all a oa kaset tre da vetek Lestrevet.

Ha lod all 'oa charreet tre da barrez Ploudiem
E-kichen ti an intron e oant lakaet bras en ur bern

E Pont-ar-Veuzenn ha Ploudiern ar mein-bonn oa berniet
'Kichen ti-ker Pont-ar-Veuzenn ar paperiou 'oa devet.

'Kichen ti-ker Pont-ar-Veuzenn ar paperiou 'oa devet.
Med an itron 'drenv ar prenestr a oa chomet brav ku'et.

Med deus a-barrez Telgrug, pevar bloaz 'zo tremenet
Seizh labourer hag hanter-kant 'oa barnet ha kondaonet.

C'hwec'h labourer 'vit tost da gant a zo bet kondaonet c'hoazh
Poent eo deomp 'ta, Bretoned, poent eo deomp chench penn d'ar vazh.

Loeiz ROPARS